



# CANTIC SPIRITUEL

VAR BUEZ SANTEZ EODET,

*Ginidic a Escopti Leon.*

Var ton Guers THEOPHILUS.

**C**LEVIT oll, tud yaouanq a escopti Léon,  
Clevit ur Vers nevez a doucho ho calon,  
Compozet, er bloa-ma en henor da Eodet,  
Ur zantes a Leon, herves ma eo scrivet.

A gastel Tremazan, e pares Landunvez,  
Galon, un dijentil eus ar c'haera lignez,  
A zeuas da eureuji, evit qenta pried,  
Merc'h ar Prinç eus a Vrest, Florança oa hanvet

Bagale o devoe, mæs oll n'o hanvan qet:  
Unan eo Sant Tang'y, un all Santez Eodet;  
O daou pa gommaniont caout uzach a ræzon,  
Gant o mom e oent desqet da ober oræzon.

Da bratica'r vertuz chasscal ar pec'het,  
Da dec'hel diouto er el di-eus serpantet;  
Ar pez a zo necesser a rea ar vugale,  
Evit goude ar maro, mont da velet Doue.

Hog'en ar maro cris, dinatur hag ingrat,  
A lamas digante o mam santel ha mat,  
A roas dê siouas, ul lesvam millig'et,  
Carg'et eus a valiç ebars en o andret.

Ur bloas goude maro emeus a Florança;  
Galon e Brosaos a c'has d'en em rente;  
Eno un demeze souden a eureujas,  
Mael a galite hag eus a valiç bras.



E castel Tremasan pa oant en em rentet,  
 Pelec'h oa Sant Tang'y gant e oll c'hoarezet,  
 Souden ar vam nevez, guir lesvam leshanvet,  
 A gommanç d'o zreti evel un drouc-speret.

Nemet ar blasfemou ha mallosiou infam  
 Na glêo an daou vug'el a c'henou o lesvam;  
 Evel torfetourien ouspen hi o c'hanne,  
 Hep nep respet d'o zad p'ini e zamalle.

Sant Tang'y alafin o tont d'en em squiza,  
 Goude eis bloas bemde bet tretet er c'his-ma,  
 Gant conje mat e dad a yas prest da Baris,  
 Evit ous e lesvam evita ar maliç.

Cris vize ar galon na zeuje da ouela,  
 O velet Sant Tang'i o tont da g'imiada  
 Dious Santez Eodet, e c'hoar muia caret,  
 O façou dê o daou gant daelou goloet.

Penaos, va breur Tang'y, eme Santez Eodet,  
 E teuit d'am dilezel da veza boureviet;  
 Mæs n'ouffemp pareat, aretomp hon daelou,  
 Guel e ve ma souffren evit souffr hon daou.

Sant Tang'y o ouela ne alle get parlant,  
 Gant truez ouz e c'hoar, a gar parletamant,  
 E galon gant glac'har a zo qazi rannet  
 O clêvet ar c'homzou eus e c'hoar Eodet.

Allas! Eodet, breman cetu c'houi oc'h unan;  
 Ruillet viot bemde dre gastel Tremasan  
 Gant an treid millig'et eus ar bleizez infam  
 Zo couet dêc'h e partach elec'h ur guir lesvam.

Eodet, goude beza ous he breur qimiadet,  
 A bromet da Zoue souffr gant patientet  
 Eus a bers he lesvam an oll insolansou,  
 O respeti senti hep clasq nep ræzoniou.

He lesvam, er c'hontrol, a redouble a valiç,  
 Dre moyenou neves e zourmant e pep g'is,



O velet e gare vaqi d'an orezon,  
 Evit dont d'e ampech, cetu aman ar rézon.

Darn he demezelet ha servicherezet  
 A gassas en ho hent evit caout ur sujet  
 Da ober da Eodet labourat incessamant,  
 Er c'hamprou, er g'eg'in, hep dezi nep damant.  
 Dirac he orator, bars en he c'habinet,  
 Oc'h ober orezon alies oe cavet;  
 Mes he lesvam mechant qement-se pa santas,  
 Orator, cabinet, tout en o ranversas.

Pa sonet er chapel ar c'hloc'h d'an oferen,  
 Peini a gare da glêvet pen da ben,  
 Labourat er g'eg'in ha g'erc'hat an oll dour,  
 Neuze e oblige hep rei dezi sicour.

Ous he zad, he lesvam biscoas ne oue disent;  
 Gant respet bras e rê qement a ordrenent:  
 Pa ne alle en deis vaqi d'an orezon,  
 An darn brassa en nos e rê a vir galon.

Gant avis he directeur e promet da Zoue  
 Biviqen, emezi, pried ne devize,  
 Evit galloud bemde sonjal er bassion,  
 A oa sur, pa alle, e occupation.

Gant he mam Florança e devoa bet disqet  
 Donet da soulaji ar beorien ezomet,  
 Cals eus he repasiou goude a rezerve,  
 Hag hep gout d'he lesvam deo ractal er c'hasse.

Un devez dre goal chanch e rancontras Eodet  
 O cas an aluzen d'ar beorien ezomet,  
 Hag eno var ar plas gant outrach e c'hannas,  
 Ha bara ar beorien gant he zreid a flastras.

Goude e veza bresset, d'ar chas prest en tolas,  
 En despét da Eodet, da Zoue er c'hrouas,  
 Ar Zantez patient hep lavaret ur g'er  
 A retorn d'ar c'hastel da offr oll d'hor Zalver.



Caer e devoa he lesvam dont d'e fersacuti,  
 Na fallout qennebeut dont d'e ancanti,  
 Ar brud eus he vertuz partout a oa scuillet,  
 A denne an noblanç da zont oll d'e guelet.

O velet qement-se e arrach a gresqe,  
 Pa velas an noblanç a g'enta qalite  
 O tonet d'e reglasq evit e eureuji,  
 Hag a bep avantach o toat d'e assuri.

Bete breman Eodet zo bet indifferant,  
 Oll qement tra a zouff a zouff hep nep damant,  
 Mes dont da eureuji biquen ne gonsante,  
 Goude rei da Jesus he c'horf hag he ene.

Er féçon-ma dezan ec'h adres e feden:  
 Jesus, va guir bried permetit ma varfen  
 Qent evit birviquen terri ar bromessa  
 P'ini ameus great deoc'h hag a ratifian.

Ar valiç he lesvam a zervichas dezi  
 Da ampech ma rancse donct da eureuji,  
 O velet ezedo en un estim qer bras,  
 Prest pel dious ar c'hastel var ar meas e c'hassas.

Eno en un tiig hag en meurbet dister,  
 Bemdez he orezon a offre d'hor Zalver,  
 Ha cals a euvrou mat bemdez a exerce  
 En andret pep unan na guella ma elle.

Cals a blac'het yaouanq a oa bars er c'hanton  
 Dre e scol hag exempl touchet en o c'halon,  
 A renonças a grenn da vaximou ar bed,  
 En em roas da Zoue dre garante barfet.

Erfin he breur Taag'y a Paris distroet,  
 E cavel Tremazan prest eo en em rentet,  
 Hag hep e anaout er zal oue cunduet,  
 E peléc'h ma yoa cals eus a zemezillet.

Ha pa oa gant an oll gant respet saludet,  
 Souden e c'houlennas pelec'h eds Eodet.



Qer buaz e lesvam en tennus a goster,  
E sonjal e c'hlasse evit ober al lez.  
Neuze an traitourez a lavaraz dezan  
Coves ar virionez ouzoc'h a zeziran;  
An demezel Eoder a zo ur plac'h collet,  
Zo ur prostituet a g'ement a gafet.

He obstination, he buez debordet  
D'he c'has var ar meas e deus or c'hontraignet;  
E clasq, allas! golo gant guel facilitate,  
Malheur un demezel demeus e c'halite.

O credi re vuan Tang'y a zortias,  
Gant coler ar brassa e c'hoar a glasqas  
E gichen ur feunteun e dalc'hi he dillat,  
Evel ma er guelas en e galvas rimat

Eoder pa er c'hlevas a gommanças tec'het,  
Rac ma zoa ganti oll dianavezet,  
Mas én ous he fourcui neuze prest e zrapas,  
Ha gant un tol cle e a grenn e dibennas

Pa oa couezet d'an douar o velet he bruchet,  
Carg'et a êr-caoulet hep gouzout ar sujet,  
Dious an amezeyen neuze en em informas  
Eus a vuez Eoder ar pez en estonas.

An dud oll glac'haret a lavaraz dezan  
Bebet e deus Eoder assur bete breman  
Gant pep seurt saotelez exempl mad er c'hanton;  
Glac'har vras hon eus dei eus a greis hor c'halon.

He lesvam cris, allas! e deves hy chasset  
Eus a gastel he zad hag aman banisset  
Gant pep seurt paourentez, al lêz oc'h eus gueles  
Da zoulaji ar paour e cus oa destinet.

Pa en devoa Tang'y ar virionez clévet,  
E oue date dezan mervel gant an despet  
Gant qeus en e galon d'e beza dibeunes  
O credi re vuan e esyam connaret;



D'ar c'hastel e teuas da gaout e dad Galon,  
 En eur squilla daelou eus a greis e galon;  
 Pa antreas er zal e dad a rancontras,  
 Qer buan d'an daoulin dirazan en em stringas.

Eno e tisclerias : me eo bo mab Tang'y,  
 A verit ar maro, hep caout nep damant din  
 Allas! siousas, allas! va c'hoar muya caret  
 Gant un taol cleze ameus bet dibennet.

E ouela da Eodet pa oant eno o daou,  
 Al lesvam oa e joa guelet oll e canvou  
 Souden e creis ar zal Eodet a antreas  
 He fen en he daouarn eno ec'h apparissas.

Eno var he gouzoug he fen a aqliqas,  
 Hag evel diag'ent outi en em stagas;  
 Qerqent ous he lesmam e tro publiqamant,  
 Hag evelen outi e commanqas parlant :

Pep tra oll er bed-ma en devez e amzer;  
 Doue bete ur poent a zoufr gant ar pec'her,  
 He maliq e devez souffret bete brema,  
 Ema o prepari donet d'o punissa.

Adieu eta, lesvam dinatur hag ingrat,  
 Deut eo an heur brema deomp d'en em guitat;  
 Great eo ac'hanoc'h, prest eo coler Doue  
 Da gueza var-ho pen pad an eternite.

Ur c'hren qen violant eno e c'homeras,  
 He antaillou couezet gant he zreit a bressas;  
 Erfin gant e arrach d'an douar en em stringas,  
 Hag evel ma velot he buez a finissas.

Aziouc'h ar c'hastel ar gurun o trouzal,  
 A zeuas da sponta qement a oa er zal,  
 Qer buan o coueza e crevas an doen,  
 Hag hep offanci den he losqas pen da ben.

Ar dud oll estonet a zeuas da grenas,  
 O velet un iron eus a greis he joa



Ebars en un instant e ludu oe rentet,  
 Allas! hag he ene livret d'an drouc-speret.

Incontinent Eodet ous he breur a droas,  
 Hag ounta publiqamant evelen a gomzas:  
 Pa em guelzoc'h, va breur, me n'oc'h anayen qet,  
 Ar pez a roas din guir sujet da dec'het.

Mæs cusul hon lesvam a oun eifat brêma  
 Eo bet deoc'h ar sujet da zont d'am dibenna,  
 Ha rac se ar Verc'hez meus pedet a galon  
 Da c'houlen evidoc'h digant Doue pardon.

Qer buan d'an daoulin Targ'y en em stringas,  
 Ous e c'hoar a galon pardon a c'houlennas;  
 Pardon, va c'hoar, pardon d'o peza massacret,  
 Va c'halon gant glac'har a zo qazi ranret.

He oll sacramanchou goude a recevas,  
 Hag ebars un instant adare e varyas;  
 Neuze gant an ælez d'an ên oe cunduet,  
 Endra pado, Doue da veza curunet.

He c'horf goude a oue enterret gant honor  
 E pares Landunvez peurdest da vord ar mor;  
 Eno he deus great cals eus a viraclou,  
 Abca voa he ene er gloar eus an ênvou.

Perac oll tud yaouanq couls ha Santez Eodet,  
 Ne sentet ous ho tud, renta dezo respet;  
 Perac ne andurot pa en deveus anduret  
 Gant ul lesvam cruel a g'ement a gafet.

Perac dious ar pec'het hag an ocasion,  
 Na dec'het couls hag hy hag ober oræzon,  
 Pa zeo guir ar Verc'hez rac an æl a spontas,  
 Ha santez Eodet rac he breur a dec'has.

Perac, pa zoc'h fragil evel m'eo ur pôd pri,  
 N'o pezo qet a spont hag er mæs hag en ty?  
 Rac an ocasion da goea er pec'het,  
 E fot tec'he louti cals a dud zo daonet.



E chom re dost d'an tas e teuer d'en em boazat,  
 E chom diodan ar glao en em glebier umat,  
 E vit en ocazion na guesset er pec'het,  
 N'oun nemet tri remed : tec'het, tec'het, tec'het.

Tec'het prest... ar maro bemdez a didosta,  
 M'ar g'ell o surprino pa sonjoc'h nebeuta;  
 Cals eus a dud yaouanq oc'heus ana-ezet,  
 Hag a greis o yec'het he deveus discaret.

Qenz o pezo neuze fot da veza heuliet  
 An exempl a vertuz eus a Zantez Eodet :  
 Commancit ta bréma da veva evelti.

Hag e viot en ên curuget couls hag hi.

Pelloc'h eta, pa viot gant ho tud goa' diêtet,  
 Ous castel Tremasan troit prest ho spelet,  
 Gant he lesmam eno petra souff' Eodet,  
 Sonjit ha grit evelti, gant Doue viot paet.

Ar vers-ma zo dediet da yaouanqis Leon,  
 P'en hini, mar qeront, e cavint ar saçon  
 Da bratica ar vertuz caret Doue a galon.  
 Dre exempl ar Zantez bevet en o c'hanton.

Itron Santez Eodet, bezit avocadez  
 Da yaouanqis Leon, heuilla rint ho puez;  
 Oll guella ma illint en amzer da zonet  
 Chetu man ar c'hontrat ganto oll goarantet.

Etrezomp tud yaouanq, a escopti Leon,  
 Pelloc'h e prometomp emeus a quit galon  
 Inna ar vuez eus a Zantez Eodet

E vit goude'r maro mont d'an ên d'e guelet.

F I N.

---

E Montroulez, e ti LÉDAN, e tu ar Vur.